

An "Hini Goz"


o vont da denna he foltred

PEZIG-C'HOARI

en 1 Arvest

evit merc'hed yaouank

GANT D. N. D.



*Kinniget gant doujans d'an
Orou ha d'an Itron O. VALLÉE,
Benac'h.*

EDITIONS FEIZ HA BREIZ

BREST. — MOULLEREZ RU AR C'HASTELL, 4. — BREST



10689

15
89
682
LEN



An "Hini Goz"
o vont da denna he foltred

PEZIG-C'HOARI

en 1 Arvest

evit merc'hed yaouank


GANT D. N. D.



Kinniget gant doujans d'an
Otrou ha d'an Itron O. VALLÉE,
Benac'h.

EDITIONS FEIZ HA BREIZ

BREST. — MOULLEREZ RU AR C'HASTELL, 4. — BREST



ROLL AR C'HOARIEREZED

An Hini goz.
Marijan.
He merc'h-vihan.
Eun intañvez.
Merc'hed yaouank.
Eur plac'h yaouank all.
Matez an dennerez poltrejou.

*
**

An Hini goz, bleo gwenn rodellet, a vo gwisket a *c'hiz koz*, *EUS AR C'HAERA*, kouef bras hag all; — *ar merc'hed yaouank* a vo stipet a *c'hiz nevez*, lostennou berr berr ha digor diouz krec'h; — *ar plac'h yaouank all* a vo gwisket kempenn; — *ar merc'h-vihan* a vo difetet, gant eur pikol tog ruz, rubanou glas; *Marijan* hag *an intañvez* a vo dereat en o doare.



An “Hini goz” o vont da denna he foltred

Pezig-c'hoari en : Arvest evit merc'hed yaouank



DIVIZ I

MARIJAN — AR VATEZ

MARIJAN, *a-ziavéz*.

Eun itron a zo o chom aman hag a denn poltrejou?

AR VATEZ

Ya, moereb!..

MARIJAN

Da lavaret eo, ober awalc'h a rafe d'in ma fatrom war baper?

AR VATEZ

Ya sur! Ne vezo ket startoc'h ober ze d'eoc'h eget d'eun all, marvat?

MARIJAN

Pegait he deus ezomm d'ober ze?

AR VATEZ

Eiz deiz, da nebeutan; pemzek deiz, d'an hirran.

MARIJAN

Eiz deiz? Ne renkin ket chom aman keit-all?

AR VATEZ, o c'hoarzin.

Oh! nan sur; anez e vefe leun an ti dalc'hmad. Ne bado nemet eur vunutenn ar pezh he deus ezomm d'ober ganeoc'h; goude c'houi 'yelo d'ar gêr, ha hi a beurchuo al labour hag a lavaro d'eoc'h pegoulz dont da gerc'hat anezan.

MARIJAN

Ze zo memez tra evel pa 'z eer da lakat ober eur gorfenn nevez; rei a rit ho muzul d'ar gemenerez ha goude e teuit d'ar gêr.

AR VATEZ

Memez tra eo, nemet aman... (o c'hoarzin) e roer ar muzul eus ar genou.

MARIJAN, o c'hoarzin ive.

C'hoant ' peus da lavaret penôs, arôk lakat anezan war baper, eo red gouzout peseurt ment en deus?

AR VATEZ

Ma feiz, ya!

MARIJAN

Roet e vezo ar muzulioù 'zo red, nemet e vo grêt mat al labour, rak da gas da Bariz eo, d'am mab ha d'am merc'h-kaer a zo o chom... bah!.. ru... Maïjanta. Ar ru-ze he deus eun hano evel ma hini!

AR VATEZ o c'hoarzin.

Ru Magenta, marvat?.. Hag e kasit ho poltred d'ezo?

MARIJAN

Red eo d'in, evit ne vo ket ken torret ma fenn d'in gant ma merc'h-kaer! Da bep lizer, à zigouez du-man, e klevan ar memez pôz: « Pegoulz e kasoc'h ho poltred? » Me, kleo, biskoaz n'am oa grêt tennan ma foltred... Arsa, sellet a ran ouzit... Lavar d'in 'ta ha n'out ket te merc'h da Julig al Lukas, eus Kerfôenn?

AR VATEZ

Ha c'houi eo Marijan Kadlc, eus Kerginiou?

MARIJAN

Sonjal mat a ren e oa te oa. Klevet am oa lavaret e oas deut e kêr. Diaviz out bet, rak n'eo ket labour a vank e ti da dad, met ar yaouankiz ac'hanoc'h, n'eo ket gwir, a zo deut da vezan dibenn ha didalvez? Aman n'eus ket a voc'h da voueta, na saout da c'horro, na douar da duriat, han? Red mat eo koulskoude, va merc'h, boueta al loened ha turiat douar, peotramant kêriz a rafe kof-moan. Hag en em blijez evelse?

AR VATEZ, feuket.

Pa n'en em blijin ket ken, n'in ket da lavaret d'eoc'h!!

MARIJAN

Gortoz 'ta; ze ne zell ket ouzin, met kement ha kôzeal eo! Me 'zo deut aman da denna ma foltred ha netra ken!.. Hag e oan o lavaret penôs, d'am amzer-me, ne oa ket ar c'hiz da denna ar poltrejou. Da betra 'talv ze? Ha koulskoude, ar merc'hed a oa ken koant ha ken moust 'vel int breman, war an ampl! N'eo ket lavaret eo! Gwelit anezo aze, foei! gant o lostennou dilostet hag o gouzougou dibluet! Hag e kredont mont evelse da denna o foltred? Me ne gredfen ket, zoken, lakat va fri ermêz!.. Gant ar vez 'ta! Me, kleo, 'zo eus ar c'hiz koz! Sell aze eur vroz merinnoz doubl hag a zo kasi ken koz ha me ha n'eo c'hoaz nemet hanter-uz! Danvez fêtis, danvez mat, evel don ive! Ar seurt-ze, plac'h, n'eo ket stipadennou int! Sell aze va mouchouer bras hag a zo bet d'am mamm! Ar seurt-ze a lak eur plac'h teurn hag a ro neunv d'ezi? Va merc'h-kaer a blij e d'ez e mouchouer bras. Gant se, am eus laket anezan da zont da denna va foltred.

Gwelloc'h eo ganen, kleo, kas va foltred da Bariz eget n'eo mont va unan. Ar veaj a zo hir ha koustus! Me glev eo kresket, diouz an hanter, priz an henchou-houarn...

AR VATEZ

Eun tavanjer kaer ho peus ive?

MARIJAN

Ma davanjer satin! Henez a zo bet d'am mamm-goz... E sonj e oan bezan lezet anezan gant va merc'h kaer, met

hounnez ne zoug ket ar seurt-ze! Eur stipadenn eo ive!
Gwaz a-ze eviti! monet a reiō d'am merc'h-vihan! (*Ouz en em zellet*) Ha ne vin ket mat evelse da denna va foltred?

AR VATEZ

Oh! Mat sur!

MARIJAN

Ya, met sell eno; red eo d'in gortoz va merc'h-vihan am eus c'hoant e vefe tennet he foltred ive. Me 'baeo 'vidomp hon diou.... Pegement e kousto, a gav d'it?

AR VATEZ

Mar tennit ho taou boltred war memez paper, e kousto d'eoc'h eun hanter nebeutoc'h.

MARIJAN

Feta, neuze e vo grêt, ken ker 'vel m'eo an holl draou breman! Eun donjer eo!.. Gallout a ran gortoz aman ma tigouezo ma merc'h-vihan hag he mamm?

AR VATEZ

Ya da! (*O klevet son*)... Tud a zo... Azezit! Ec'h an da zigeri!

(*Marijan a azez*).

DIVIZ II

AN HEVELEP RE — AN INTANVEZ

AN INTANVEZ, *ouz toull an nor*.

Livirit-hu d'in, plac'h, piou a labour 'barz an-ti-man?

AR VATEZ

Piou? An dimezel Ker...

AN INTANVEZ

Pesort micher a ra, a c'houlennan? Ne fell ket d'in beza tapet diou wech...

AR VATEZ

Pesort labour? Tennan ra poltrejou, evel ma welit eo merket war an nor!

AN INTANVEZ

N'ouzon ket lenn da c'halleg! (*O tont en ti*) An deiz all e oan bet tapet, e oan êt da di eun tenner dent da glask tenna va foltred!.. Pa voen arru, hep goulenn netra diganen, e voen laket en eur zal evel houman. Setu pa voe deut ma zro, eun ôtrou gant eun tavanjer gwenn a gasas ac'hanon en eur zal all hag a lakas ac'hanon da azeza war eur gador-vrec'h, sort n'am boa ket gwelet biskoaz hini. Ar wech kenta oa d'in da vont da denna va foltred, (red e oa, 'vel ouzoc'h, d'an intanvezed brêzel, vit gellout touch o zammik pansion). Me a zonje: Sell 'ta, en eur gador e vin laket! me a vo eur baborez war va foltred avat! Ar seurt-ze!

Potr e davanjer gwenn a dostaas ouzin gant eul loa vihan en e zorn: « Digorit ho kenou! » emezan. — « Digeri ma genou? emon-me »; me a gawe ze drol mat, c'houi 'oar, digeri va genou da denna va foltred. Evelato, hen ober a ris eun tammik bihan, pegwir e oa gourc'hemennet d'in. — « Brasoc'h! emezan; evellen! — Hag e tigoraz dirazon eur pikol pezh forn, kement hag ar forn râz e Montroulez. — Biken, birviken, emon-me, ne zigorin ma genou ken bras-ze da denna va foltred! — Pôtr e davanjer gwenn a yeas droug ennan: « Tenna ho poltred? Tenna ho poltred? Tenna dent a vez grêt aman! » Me, o klevet, kement-ze, a zavas evel eun tenn ha d'an nor! — Paea va amzer d'in, emezan, a zo d'ober? » — « Paea petra? emon-me; ha va amzer me neuze! » Hag e teuis kuit gant va dent ha va arc'hant.

Aman, e lerez te neuze, plac'h, e vez tennet poltrejou?

AR VATEZ, *o c'hoarzin*.

Aman e vez tennet poltrejou, ya! Setu aze eur wreg hag a zo deut ivez da denna he hini! Azezit da c'hortoz!

AN INTANVEZ

Mat eo! Azezomp!

DIVIZ III

MARIJAN — AN INTANVEZ

AN INTANVEZ

Piou en dije lavaret em bije me biskoaz tennet ma foltred? Keit m'on bet dimezet, koulz hag arôk, em bije bet mez ouz hen ober, ha breman, pa 'z on intanvez hag arru koz, e ven kavet aman e renk ar merc'hed yaouank? (*O sellet ouz Marijan*). A drugarez Doue, n'emaon ket ma unan! C'houi, gwreg, a zo deut aman ivez, marvat, war an hevelep digarez ganen.

MARIJAN

A dra zur, n'on ket deut 'vit ma flijadur! Panevert d'am merc'h-kaer, na dav beg ebet kas kaout ma foltred, n'am bije ket dispignet arc'hant da lakat ober d'in ar pezh a welan bemdez 'barz ar mezellour, pa garan!

AN INTANVEZ

Ni n'omp ken eus ar c'hiz!... Me a anavez eur plac'h ha n'eo ket a-walc'h d'ezhi redek, kas a ra he foltred dre holl da di he mignonezed, evit gellout en em gaout e meur a lec'h war eun dro, ha kaout tu evelse da vezan anavezet muioc'h. Ni ne blije ket d'eomp 'n em diskouez na klevet e veze komzet ac'hanomp; breman, ar merc'hed eus ar c'hiz ne glaskont nemet bezan gwelet, ha n'ouzon ket petra ne rafent ket na penôs n'en em lakfent ket evit klevet goulenn pa dremenont: Piou eo hounnez?

MARIJAN, *o sevel da zellet a gleiz.*

Pa 'maomp o komz anezo, setu aman diou ha me gav d'in emaoch o paouez liva o foltred! Emaint o kêzeal gant ar vatez... e galleg, mar plij!... N'heller ket lavaret int deut heb o botou, heb o dilhad, ne lavaran ket! Bezan o deus kof-gar ha jave, marvat! D'an holl da welet... Arru int!

DIVIZ IV

AN HEVELEP RE
DIOU BLAC'H YAOUANK — AR VATEZ

AR VATEZ

Asseyez toutes deux.

AN DIOU BLAC'H

Oh! nous sommes pas fatiguées!

KENTAN PLAC'H YAOUANK

La tireuse de portraits n'est pas à la maison, alors?

AR VATEZ

Oh! Elle va arriver! Prenez votre patience un petit peu!

EIL PLAC'H YAOUANK

Nous sommes loin d'ici à rester, oui mais!... Tu sais bien!

AR VATEZ

Oh! Il n'y a que ces deux-là ayant vous!

KENTAN PLAC'H YAOUANK

Tu es bien ici alors, Maï-Fransoaz?

AR VATEZ

Oh! oui, je suis arrivée bonne (1) avec la madame et avec la fille de chambre, et on rigole!

EIL PLAC'H YAOUANK

Chic à toi, ma chère!

AR VATEZ

Je vais kuit. A tout à l'heure!

Mont a ra ermêz.

(1) Arru mat.

DIVIZ V

AN HEVELEP RE, nemet AR VATEZ

MARIJAN *hag an* INTANVEZ *a zo azezet kichen ha kichen war diou gador, ouz ar voger*; AN DIOU BLAC'H YAOUANK *en em lak da zellet ouz paperou war eun dôl hag a zo ez-eün, e tu-all d'ar zal. Unan anezo a dro he c'hein d'an diou blac'h koz hag eben a zell outo, gwech ha gwech, dreist he skoaz. Kuzulikat a reont ha c'hoarzin e kuz. An diou goz a gêze ive goustadik, eun doare drouklaouen d'ezo.*

KENTAN PLAC'H YAOUANK, *goustadik.*

Sell 'ta an diou « statu » a zo aze ouz ar voger!

MARIJAN, *goustadik.*

N'am oa ket lavaret d'eoc'h! Gwelit anezo! Setu aze diou baborez!

EIL PLAC'H YAOUANK, *goustadik.*

Gwelet awalc'h am eus! Daoust ha da dennan o fol-tred int deut? N'eo ket kredabl! Kentoc'h o deus kollet o hent! (*Poufan a reont*).

AN INTANVEZ, *goustadik.*

Ha gwelet 'peus biskoaz kemend all? N'o deus ket a lerou war o diouha!

KENTAN PLAC'H YAOUANK, *goustadik.*

Sell tavanjer an hini en tu-man! Mat eo d'ober eur vroz d'in-mel!

EIL PLAC'H YAOUANK, *goustadik.*

Lavar 'ta: d'ober diou vroz, ha c'hoaz e vefe re. (*Poufan a reont*).

MARIJAN

Gwelet penôs e skrignont? Daoust ha diwar hon penn eo ez eus savet ganto kemend all a jolori?

AN INTANVEZ, *goustadik ha dipitus.*

Lezit 'ta! Maskaradennou! Ar seurt-ze n'o deus onestiz ebet!

KENTAN PLAC'H YAOUANK, *goustadik.*

'Meus aon 'zo droug en diou goz o welet ac'hanomp o c'hoarzin!

EIL PLAC'H YAOUANK, *goustadik.*

Ma karfent chom er gêr, ne vefe ket c'hoarzet diwar o c'houst!

MARIJAN, *o sevel, d'ar merc'hed yaouank.*

Chilaouit 'ta! Klevet am oa komz eus merc'hed divergont...

KENTAN PLAC'H YAOUANK

Ha me, eus gwrac'hed koz dipitus. (*Ar peder blac'h a zo en o zav, troet an eil ouz eben*).

MARIJAN, *o sellet outo, euz an traon d'an nec'h.*

Evel kent, ar seurt ganeoc'h c'houi ne dlefent ket bale!

KENTAN PLAC'H YAOUANK, *memez tra.*

Nag ar seurt ganeoc'h-c'houi ne dlefent bale nemet en noz!..

MARIJAN, *droug enni.*

Heugi ra an dud onest dirazoc'h, loudourenn!

KENTAN PLAC'H YAOUANK, *droug enni.*

Spontan rit an dud, koz kaouenn!

MARIJAN

Gwelit ar pezh divergont! Ober goab ouz an dud koz!

KENTAN PLAC'H YAOUANK

Ha c'houi, pa n'oc'h ket 'vit gouzanv ar re yaouank!

DIVIZ VI

AN HEVELEP RE — AR VATEZ

AR VATEZ

Va Doue! Petra zo arru?

EIL PLAC'H YAOUANK

Eur barr terzienn 'zo kroget 'barz an diou goz-man...
Mat e vefe d'eoc'h diskouez d'ezo pelec'h 'zo eur me-
disin o chom!...

AN INTANVEZ, *o sevel he diouvrec'h d'an nec'h.*

Evellen eo e saver tud breman! Ma 'm bije bet eur
verc'h par d'it am bije... oh!... (*Mont a ra warzu ar plac'h
yaouank, savet he dorn.*)

AR VATEZ, *o kregi en he brec'h.*

Arabad eo!.. arabad eo!.. Skei a zo difennet!..

EIL PLAC'H YAOUANK

Lezit 'ta!.. Aman 'z eus polis, marvat!..

Klevet rêr ar c'hloc'h o son.

AR VATEZ

Peoc'h, en han ' Doue! Tud a zo ouz an nor!

*Mont ra da zigeri. Kerkent e teu er zal eur plac'h yaouank
gwisket kran ha dereat, er vat ha seder d'ezi. Saludi ra en
eur zigouezout ha mont a ra d'azeza en tu all d'ar zal.*

DIVIZ VII

AN HEVELEP RE

AR PLAC'H YAOUANK KRAN, *sioul ha dizeblant.*

An diou all adkrog da zellet ouz skeudennou, troet o c'hein.

AN INTANVEZ, *da Varijan*

Me 'garje vije bet eur priz da rei aman hiriô!... Na c'houi!

MARIJAN

Me ive!

AN INTANVEZ

Eur priz kaer!

MARIJAN

Ya! Unan a dalvoudegez!

AN INTANVEZ

Peotramant e vije bet en em gavet aman eur pôtr
yaouank, eur pôtr yaouank a zoare, n'eo ket eur paker
kelien bennak...

MARIJAN

Ya, hag hon dije galvet anezan d'ober e zibab (*goustadik*)
etre an teir-man..

AN INTANVEZ, *e skouarn Marijan.*

Pehini a gav d'eoc'h en dije dibabet?

MARIJAN, *e skouarn an intanvez.*

Da behini a gav d'eoc'h en dije roet ar priz?

AN INTANVEZ, *krenvoc'h.*

Evidon-me ne vijen ket nec'het!

MARIJAN

Na me, kennebeut!

AN INTANVEZ, *o selaou.*

Me glev ar c'hloc'h; gêdomp eun tammik; marteze eo
arru ar pôtr...

*An nor a zigor ha diou, teir, peder blac'h yaouank
gwisket iskis a deu er zal. Saludi reont an diou all. Mes-
kailhez galleg saout ha brezoneg podou. Souden e teumont
da guzulikat etrezo ha da vousec'hoarzin, o sellet a gostez
ouz an diou goz.*

AN INTANVEZ, *da Varijan.*

Pesort skipailh eo ar re-man? Ha c'houi 'gav d'eoc'h
e c'hellomp ni chom etouez ar seurt-man? Gwelit anezo
o sellet ouzomp! Peziou divergont!

O diou e savont en o zav.

EIL PLAC'H YAOUANK, *da Varijan.*

Ah! moereb koz, arabad tec'het. Ni hon deus ezomm eus hoc'h aliou.

MARIJAN, *o vont warzu an nor.*

Va aliou me ne raint ket d'eoc'h na droug na vad!...

KENTAN PLAC'H YAOUANK, *o vouskanan.*

Fachet eo an hini goz, an hini goz, an hini goz,
Fachet eo an hini goz, defot a ridou war he broz.

Holl e tirollont da c'hoarzin.

MARIJAN

Goab a rit? Ouzoc'h e stago, kredit ze mat!

AN INTANVEZ

Grit va gourc'hemennou d'ho mamm, va flac'h vihan!

KENTAN PLAC'H YAOUANK

Trugarez, moereb!

Pa ho 'po tennet ho poltred, kaset-hen d'in, me ho ped!

AR RE ALL

Ha d'in ive! (*C'hoarz.*)

MARIJAN, *d'an intanvez.*

Deomp ac'han!

Mont a ra warzu an nor.

TEIRVET PLAC'H YAOUANK, *poultr riz war he genou,
o vont diraki.*

Arabad d'eoc'h mont kuit arôk m'ho po tennet ho poltred!

AN INTANVEZ, *o trei anezi a gostez.*

Set ' ar vaskaradenn! Kea da walc'hi da c'henou!

AR VATEZ, *diwar doull an nor.*

Me gred e klevan trouz aman adarre!

EIL PLAC'H YAOUANK

Te 'zo kaoz! Perak e lakez re goz gant re yaouank?

AN INTANVEZ

N'eo ket ar yaouankiz, an dizonestiz ac'hanoc'h 'n hini a ra d'in kaout abeg ennoc'h! Me zo bet yaouank ive, marvat, met ne oa ket ar c'hiz ganen d'ober goab eus ar re goz! Ne oa ket ar c'hiz ganen d'en em fichan vel...

TREDE PLAC'H YAOUANK

Red eo 'n em lakat e giz gant ar re all, pe chom er gêr e korn al ludueg!

PEDERVET PLAC'H YAOUANK

N'heller ket harz ouz ar bed da vont war rôk, moereb koz!... Eur plac'h yaouank a rank heuilh ar c'hiz!

MARIJAN, *o vont da gaout ar plac'h yaouank kran
hag o kregi en he dorn*

Me ' gav d'in setu aman ive eur plac'h yaouank! — Na vezit ket mezek, va merc'h, rak aman, evidon-me, c'houi eo ar rouanez! Pehini ac'hanoc'h, merc'hed, a dosta outi?

AN INTANVEZ

C'houi, ar c'hiz a ren warnoc'h; hi, a ren war ar c'hiz. Gwelit ar c'houef hag ar bleo-ze!

MARIJAN

Gwelit ar mouchouer-ze ken skanv e blegiou!

AN INTANVEZ

Hag an tavanjer-ze, bihan, na re vihan, broudet, na re vroudet...

Hag ar vroz-ze, n'eus ket ezomm da astenn anezi!

MARIJAN

Na pa zougfech seiz liou gwareg ar glao war ho kein, mar 'z eus genoioù morlivet dindan!

AN INTANVEZ

Ar c'haeran liou eo liou ar yaouankiz war an dioujod, liou ar furnez war an tal ha liou an onestiz er c'herc'hen.

PEMPVET PLAC'H YAOUANK

Sell da betra e oan me deut aman, da glevet sarmoniou!... Sarmoniou awalc'h a glevan er gêr!

KENTAN PLAC'H YAOUANK, *d'ar plac'h yaouank kran.*

Dimezell, daoust ha c'houi zo deut aman da rei d'eomp kenteliou?

AR PLAC'H YAOUANK *kran, souezet.*

N'oun ket evit respont d'eur seurt goulenn!

KENTAN PLAC'H YAOUANK

Perak e lezit an diou goz-man da glask trabas ouzomp diwar ho penn?

AR PLAC'H YAOUANK KLAN

Marvat, kement-ze 'zo diwar bouez m' hon deus holl en em gavet aman asambles!...

KENTAN PLAC'H YAOUANK

Mar n'eo ket dâ d'ho sellou para warnomp gant plijadur, tec'hit, it er mêz, hag ho sellou ne vezint ket anwazet pelloc'h!...

AR PLAC'H YAOUANK, *o vouse'hoarzin.*

Va daoulagad ne spontont ket dirak seurt tôlennou; n'em beus ket a zisplijadur aman; plijadur an hini am eus, ha kalz!

KENTAN PLAC'H YAOUANK, *droug enni.*

Me gred ho peus doare da vezan eun tamm rioterez! (1)

AR PLAC'H YAOUANK KLAN

Diwallit, mar sav droug ennoc'h, ho pezo êr fall war ho poltred!

AN INTANVEZ

Aze d'ezi, d'an drubardez!

(1) Pe: goaperez.

TREDE PLAC'H YAOUANK

Petra c'hedomp-ni? Ni a zo c'houec'h aman! Lakomp an teir-man ermêz!

MOUEZIOU

Ya! ya!

AN INTANVEZ

Merc'hed ar seiz kounnar! Deuit 'ta! 'Benn ho po grêt kement-ze, n' ho po ket a c'hoant ken da dennan ho poltrejou!...

PEDERVET PLAC'H YAOUANK

Petra zonjit-hu, merc'hed? Sod oc'h? Galvomp ar vatez d'o c'has kuit!

Klevet a rêr ar c'hloc'h o sôn, met, gant an trouz, den na dôl evez; kerkent, e teu er zal, digoret an nor d'ezi gant ar vatez, eur vaquez bleo gwenn-kann, sounn, ha mentet kaer, eur c'houef ganti giz amzer an dukez Anna. Eur vantell vras a c'holo he diskoaz hag a gouez betek he zreid. Eur groaz aour a zo en he c'herc'hen. Eun dan-telezenn wenn a zo war veg he manchou.

An holl verc'hed a chom dilavar ha mantret da zellet outi o tremen dirazo, evel eur brinsez. Ar plac'h yaouank kran a grog en eur gador-vrec'h da ginnig d'ezi Ar vaouez koz a azez.

DIVIZ VIII

AN HEVELEP-RE — AN HINI GOZ

EIL PLAC'H YAOUANK, *goustadik d'an trede.*

Ma kredfen, e tec'hfen ac'han, met ne gredan ket!

TREDE PLAC'H YAOUANK, *goustadik.*

Piou eo, a zonz ganit? Eus petore (1) bro?

AN INTANVEZ, *da Varijan goustadik.*

N'ouzon ket dre benôs... Kerkent ha m'eo azezet, ma c'halon a zo deut laouen em c'hreiz!...

(1) Petore = pesort.

MARIJAN, *goustadik*.

Mantret e choman! Biskoaz maouez ne 'm eus gwelet par da hounnez!... Daoust hag e petore yez e komz?

AN INTANVEZ, *goustadik*.

Hag a belec'h eo en em gavet aman? Piou a gredo komz outi?

E keit ze, ar merc'hed all a zo chomet hep kredi finval, dilavar, o sellou troet war ar vaouez koz; ar plac'h yaouank kran a zo en he sav an tosta d'ez.

MARIJAN, *goustadik*.

Ne rin ket, me!

AN INTANVEZ

Me her greio 'ta, da vihana, ma oar brezoneg, rak ne garan ket nemeur mont e galleg: pep labous, e gan ha pep den, e yez. Itron...

An holl a zo sioul hag eveziek.

Itron... mar plij... ha goulenn a c'hellfemp-ni diganeoc'h... lavaret d'eomp... hoc'h hano?

AN HINI GOZ, *o sellet a-dro ouz an holl*.

Me hoc'h anavez holl, koulskoude, ha c'houi n'am anavezit ket!

MOUEZIOU, *goustadik*.

Komz a ra brezoneg!

AN INTANVEZ

Kentan tro eo d'eomp d'ho kwelet!

AN HINI GOZ

Hiviziken me a en em ziskouezo d'eoc'h hag an holl am anavezo.

AN INTANVEZ

N'ouzon ket piou e c'hellfec'h bezan, met ouz ho kwelet, me am eus plijadur...

AN HINI GOZ,

d'an eil plac'h yaouank, oc'h astenn he brec'h warzu enni.

Plac'h, perak e tougit en ho kerc'hen ar groaz-ze hag en ho kodell ez eus eur paper hag a zo warnan komzou binimus? Dec'h, c'houi a gane du-ze en eured, hag ar pezh a ganec'h a oa eun donjer e glevet! Tennit ar groaz-ze pe freuzit ho paper ha tôlit-hen-en teil!

Ar plac'h yaouank a denn eur paper hag a freuz anezan, hep ranna ger. 'N em dennan 'ra mezek drek ar re all.

AN HINI GOZ, *d'ar c'houec'hvet plac'h yaouank*

Perak e klaskit kuitat ho kerent? Labourit en o c'hen-ver hag ho po bara... Me a fell d'in e tizrofec'h d'ho kêr hag e chomfec'h enni, e serr ho tud, hep kaout c'hoant ebet ken d'o c'huitaat!

AR PLAC'H YAOUANK, *sentus*.

Chom a rin!

AN HINI GOZ, *d'ar bedervet plac'h yaouank*.

Na gasit ket ho ker hag ho poltred d'an hini emaoe'h o sonjal dimezi gantan. Unan a zo en ho kichen; hennez a zo gwirion hag ho karet a ra; egile, an diaveziad, a zo eun toueller. Grit hervez ma lavaran d'eoc'h.

AR PLAC'H YAOUANK

Hen ober a rin!

Holl int muioc'h-mui mantret.

MARIJAN, *a gostez*.

Piou eo houman hag a anavez pep doare hag e pleg an holl d'he gourc'hemen?

AN HINI GOZ

Me hoc'h anavez holl; c'houi n'am anavezit ket!... Hoc'h anaout a ran, n'eo ket diouz ho kwiskamant, nag awechou, zoken, diouz ho yez hag ho kiziou... Chenchet ho peus ha me a zo chomet bepred henvel; setu perak n'am anavezit ket ken. (*Da Varijan*).

N'eo ket awalc'h miret ho kwiskamant, nag ho kiziou

mat, ma ne zalc'hit ket ho pugale er gêr d'o miret war ho lerc'h. Ho mab a zo dimezet e Pariz d'eun divroadez hag ho pugale-vihan a vo divroidi evidoc'h...

MARIJAN, *mantret*.

Houman a oar pep tra!

AN HINI GOZ

d'an dervet plac'h yaouank hag a zo o klask tec'hel e kuz.

Chomit, plac'h! C'houi eo a laer arc'hant ho k'erent evit gellout en em fichan gwelloc'h a-ze. Da betra ar poultr-ze 'zo war ho kenou, nemet da guzat ho tizonestiz ha da douella ar bôtred evel ma touellit ho mamm? — (*D'ar bempvet plac'h yaouank*).

Houman eo ar plac'h ôstaliri: n'he deus desket c'hoaz nemet dansal ha lakat dour 'barz ar gwin. He hano eo Monan Penn-ar-Vali, kalz a vrud d'ezi, nemet nebeut a vrud vat...

AN INTANVEZ, *o tiskouez ar gentan plac'h yaouank.*

C'hoaz unan aman, Itron...

AN HINI GOZ, *d'ar plac'h yaouank.*

Milnerez, perak ho peus kasoni ouz ho c'hoar yaouank a zo du-ze er gêr?

Ma kirit ne dremeno ket e pep lec'h en ho rôk: kemerit skouer warni ha bezit dereat evelti, ha c'houi a welo ive an dud o c'hoarzin ouzoc'h...

DIVIZ IX

AR MEMEZ RE

SOAZIG *o tont er zal, gant doare abof d'ezi ha nec'het, he sellou o klask he mamm-goz. Eur pikol tog ruz a zo war he fenn hag he dilhad a zo iskis.*

AN HINI GOZ, *o sellet outi.*

Ar pellan diouzin hervez an oad a vo an toslan hervez ar spered... Perak o deus he distummet evelse? Oh! pen-

nou goullo! Ankounac'haet o deus pep tra vat ha pep tra fall o deus desket. War o hent, da bep kammed, e lezont kement o deus a gaera ha kement tra divalo a gavont a zastumont gant evez... Paour kêz Bretoned!

SOAZIG, *he deus gwelet he mamm-goz.*

Mamm-goz! Aze emaoch?

MARIJAN

Na rit ket a drouz! An Itron ne fell ket d'ezi!...

SOAZIG, *goustadik.*

Hounnez eo an dennerez poltrejou?

AN INTANVEZ

Ya, va merc'h... Ez a da denna d'eoc'h hoc'h hini.

AN HINI GOZ, *da Varijan.*

Tostait gant ho merc'h-vihan.

Marijan, a dosta.

Lammit an tog-ze diwar he fenn!

Marijan a denn an tog.

Sell ouzin, merc'hig!

An « *Hini goz* » e par eur mousc'hoarz war he muezellou; on hini vihan a vousec'hoarz d'ezi ive.

Ha va anaout a rez?

SOAZIG, *o vousec'hoarzin bepred hag oc'h heja he fenn.*

Nann!

MARIJAN

« Nann, itron », a vez lavaret.

AN HINI GOZ, *treut da Varijan.*

Lezit hi!

O sellet ouz Soazig hag o tapout he fenn etre he daou zorn.

Va foltred a welan livet en da zaoulagad sklêr ha doun a vreizadez! Ha lavaret penôs e sellou pep bugel e vez evelse livet va foltred... hag e teuont d'hen saotra ha d'hen mastari! War ar penn bleo melen-ze e stignont eun tog,

eun tog ruz... pe c'hlas!... O kouefou dantelezet! Lakat a reont teod ar bugel da zistaga geriou eur yez ha ne gomzas gwechall e dud koz nemet 'vel eur yez estren! — O brezoneg dudius, yez santel, roet d'eomp gant Doue!... Merc'hig, ha monet a rez d'ar skol?

SOAZIG

Ya, Itron!

AN HINI GOZ

Ha desket e vez d'it eno lenn ha skrivvan brezoneg?

MARIJAN

Da zeski galleg e vez kaset d'ar skol, Itron... Brezoneg awalc'h a zesker er gêr!

AN HINI GOZ, *treut*.

Tavit ha gouezit penôs pep krouadur a dle bezan kelennet e yez e dadou! Pesort yez a gomz d'eoc'h ho peleg er gador-brezege?

MARIJAN

Brezoneg, Itron!

AN HINI GOZ

Ar beleg savet er gador d'ho kelenn a gomz d'eoc'h brezoneg; gourc'hemen an Iliz eo... Ar mestr-skol, pa bign en e gador, a dle rei ive d'ar vugaligou klennadurez en yez o zadou. Gourc'hemen ar re-goz eo!

MARIJAN

Ar vestrez-skol ne oar ket a vrezoneg, Itron!

AN HINI GOZ

Gouzout a renk yez he bugale-skol, evel ma renk ar beleg gouzout yez ar gristenien fiziêt ennan! Evelse eman an urz; evelse eman al lezenn!

MARIJAN

Al lezenn eo a zifenn, Itron, komz brezoneg er skolioù!

AN HINI GOZ

Arabad d'eoc'h chilaou ar mestr-skol pa lavar d'eoc'h: « Ar brezoneg a vir ouzin da zeski galleg d'ho pugel. »

Respontit kerkent: « Deskit ar brezoneg, c'houi, mestrskol, ha neuze elec'h bezan eur skoilh (1) evidoc'h, e teuio ar yez-ze da vezan eul liamm hag eur sklêrijenn etre ho spered ha hini ar bugel! » Ar mestr-skol a zo evit ar bugel, n'e ket 'ta, nann ar bugel evit ar mestr-skol? Azez em c'hichen, merc'hig, ha laka da zorn em hini...

AN INTANVEZ, *o stoui*.

Itron, diskouezet ho peus d'eomp piou omp; mar plij ganeoc'h, disklêriet d'eomp breman piou oc'h?

AR PLAC'H YAOUANK KRAN, *o stoui*.

Itron, m'ho ped, livirit d'eomp hoc'h hano!

MARIJAN, *a-gostez*.

Da vihana, setu tennet d'eomp hor poltrejou, hag en eun doare ha ne oamp ket ouz her gortoz!

AN HINI GOZ

Tostait hag azevit endro d'in... (*Azeza reont holl*). Gwechall, — me gomz eus eun amzer bell, — an holl am salude. Digemeret e vezen er c'hestell, er paleziou, gant soniri, kan hag ebad. Eus a Vrest betek Roazon, ne oa na kastell na maner, na ti-soul na lochenn ha ne vezed enoret enno o rei digemer d'in. Hirio, piou a oar va hano, piou a ro d'in digor! Vel eun divroadez e valean dre va douarou hag e pep lec'h e welan an dorojou o serri ouzin!...

Plega 'ra he fenn.

AN INTANVEZ ha MARIJAN, *o sellet an eil ouz eben, mantret*.

Doue!

Na piou eta eo houman?

Ar mero'hed all a chilaou sebezet. Ar plac'h yaouank kran eman an daerou en he daoulagad bras digor war ar vaouez koz.

MARIJAN, *a-gostez*.


Red eo ma vefe troet he spered!... Ne gredit ket?

(1) Skoilh = harz, e galleg: **obstacle**.

AN HINI GOZ



An hi - ni goz eo va dous! An hi - ni g'z eo, sur!



An hi - ni goz he deus ar-c'hant, An hi - ni yaou - ank a zo koant.

An hini goz
Eo va dous
An hini goz, eo sur!

I

An hini goz he deus ar-c'hant,
An hini yaouank a zo koant.

An hini goz
Eo va dous
An hini goz eo sur!

II

An hini goz he deus bleo gwenn,
An hini yaouank bleo melen.

An hini goz
Eo va dous
An hini goz eo sur!

III

An hini goz a zo gwisket
Evel ar gwir Vretonezed.

An hini goz
Eo va dous
An hini goz eo sur!

IV

An hini goz da labourat
A rafe mez d'eun ozac'h mat.

An hini goz
Eo va dous
An hini goz eo sur!

V

An hini goz a fell d'in kaout,
Pa rankfen mont da bastor saout.

An hini goz
Eo va dous
An hini goz eo sur!

VI

O Breiz-Izel, o kaera bro,
Koad en he c'hreiz, mor en he zro!

Ni 'zo bepred,
Bretoned,
Bretoned, tud kalet!

VII


Me a drouc'ho va zeod em beg
Kent diziski ar brezoneg.

Ni 'zo bepred,
Bretoned,
Bretoned, tud kalet!

VIII

Koulskoude, dreist an holl vadou,
Karomp ar C'hrist, Doue hon Tadou.

Ni 'zo bepred,
Bretoned,
Bretoned, tud kalet!



Pour suivre en détail le Mouvement breton,

Lisez : **FEIZ HA BREIZ** et **KORN-BOUD** ;

Lisez : **ARVORIG**.

S'adresser soit :

Administration **Feiz ha Breiz**, 4, rue du Château, Brest,
C/C 44-40, Rennes.

Soit :

Administration **Arvorig**, 15, rue des Capucins, Guingamp,
C/C 44-88.

ABONNEMENT COMBINE : Feiz ha Breiz - Korn-Boud - Arvorig : 13 fr. l'an.

ABONNEMENT SÉPARÉ : Feiz ha Breiz et Korn-Boud : 10 fr. l'an ; Arvorig : 6 fr. l'an.



Pour vos achats de livres bretons et celtiques,

Adressez-vous à :

Coopérative d'édition en langue bretonne, **EMGLEO SANT-ILTUD**. — Administration : 4, rue du Château, Brest,
C/C 3041, Rennes.



Pour coopérer au Mouvement de renaissance bretonne et catholique.

Affiliez-vous au :

BLEUN-BRUG, Association bretonne catholique. — Cotisation : **10 fr. l'an**. — Administration : 4, rue du Château, Brest,
C/C 3041, Rennes.

— Inscrivez vos enfants, de 8 à 14 ans,
dans la **BREURIEZ AR BREZONEG**. Cotisation : **4 fr. l'an**. —
Administration : 15, rue des Capucins, Guingamp, C/C 44-88.